



Son an teodou fall

I
Selaouit, potred a merc'het
A klevit oll ar wronez
An teodou fall d'eoc'h vø kañet.

II

C'houi pieuz dija klevet ano
Diwar ben teodou fall ar vro
Piou n'eo ket bet c'hoaz louzet
Gant en teod louz a miliget.

III

Pa vez gwelet en den iaouank
O pourmen gant er plac'hig koant
An teodou louz a ia en dro
N'or gwést da viret anezo.

IV

Er poull pà vezon o wealc'hi
An eil e ben o koumeri
A ze vez klevet an teodou
A geier leiz o ginou.

V

Pa vezon er foar, er marc'had
Atao, atao o klask goapad
An eil e ben o lavaret
Er bern trouz diwar ar botred.

VI

Soazik zo 'vont da zimezi
Perrik ive in gant Mari
Klevet e vez an teodou jalous
E trezo klask lakat an trouz.

VII
Ped n'in ket c'hoaz'fortuniet
An teodou fall o d'euz miret
Dioustu, kerken ar gouleniou
Er bern geier diouz o ginou.

VIII

Potred iaouank selagouit ta
A c'houi merc'het ia'memez tra
Kassit da bournen anezo
O ia pell bras diwar o tro.

IX

Neuze en dervez a tenuio
C'houi assemblez a zimezo
En em garit ia gant joa
An teod fall c'hello'netra.

X

Bexit eurus da virviken
Kassit anezo da bournen
Falloc'h vit ar boum atomik
Ez eo teod fall Zoaz pe Dinik.

XI

Araok echui ar janson
Me lavañ a greiz kajon
An teodou fall viche klevet
Dirak an oll viche krouget.

XII

En ifern e touesk an diaoulou
E vo kasset an oll teodou
E kreiz an tan e vo grillet
Kement teod fall a zo er bed.

PABOR KASTELL

(IFIK MOAL
de Brest)